



Erwan ar MENGA



KARANTEZ

EO

DOUE



Imbourc'h

1984

170

IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Pemzekvet bloavezh

NIVERENN 170

29 C'hwevrer 1984

Erwan ar Menga.- Karantez eo Doue.....p.5

=====

Koumanant-bloaz : 100 lur. KRP : 1 534 25 N
Roazhon, Y. Ollivier. E mliz Genver e krog ar
c'houmanantoù, ha reiñ a reont ar gwir da ze-
gemer ar stagadennoù.

Priz an niverenn-mañ : 20 lur.

Embannet e vez IMBOURC'H a-berzh ar gevredi-
gezh KENEILED IMBOURC'H. Ar skodenn-ezel a
dalvez da goumanant d'ar gelaouenn IMBOURC'H
Niverenn-wask : 50 015.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7
Bd. A.-Burloud, 35 000 Roazhon.

=====

KARANTEZ EO AN DOUE TREINDED

A-raok ar gristeniezh n'en devoa diazezer-kravez ebet, prederour ebet kennebeut, gresian zoken, ken don bennak e vije aet en anaoudegezh Doue, dizoloet pe gredet kelenn ar pezh a ziskleir sant Yann deomp: "Doue a zo Karantez!" (I Ya, 4, 8)

Doue en em anavez hag en em gar eñ e-unan, anat eo. An den ivez en em anavez hag en em gar eñ e-unan. Hogen disheñvel-krenn eo ar greadoù a garantez sevenet, ken gant Doue, ken gant an den, ha disheñvel-krenn ar frouezhanezo.

En em garout a ra an den. Engehentañ e veiz ur veizadurezh, -ur gomz speredel nemet diglok-meurbet, disheñvel-kenañ diouzh ar pezh ez eo-eñ e gwirionez. N'eo e veizadurezh nemet ur c'hloker diret eus e veiz, ha disheñvel eo dioutañ dre he natur : n'eus anezhi nemet ur skeudenn, ur vrizh-skeudenn. Meiz didermen eo Doue avat. En un doare peurreizh en em anavez

enta, ha ken peurreizh eo an anaoudegezh en deus anezhañ e-unan, e 'emaoudegezh', ma n'eo ket houmañ - pezh ez eo evit an den - ur skeudenn hepken eus e voud, met ur gwirvoud klok ha solwezel, kennatur gant ar meiz doueel en engehent hag a ro orin dezhañ. Dre en em anavezout e-unan ez engehent Doue e-unan enta - ez-speredel hag a-viskoazh-da-viken, -ur Preder, ur Gomz, ur Ger, un eil Eñ-E-Unan ha n'en em zigemm dioutañ e-unan nemet e-keñver an orin. Ac'hano an anvioù a Dad hag a Vab implijet gant ar C'hrist evit envel an daou berson doueel kentañ : Tad evit envel ar person a engehent, ha Mab evit envel ar person engehentet... An daou berson-se, diziforc'h e-keñver an orin hepken, n'int ket distag rak an daou o deus an hevelep natur doueel : "Er penn-kentañ edo ar Verb, hag ar Verb a oa Doue... Ar Mab unganet a zo en askre an Tad. Emaon en Tad hag emañ an Tad ennon... An hini am gwel a wel ivez an Tad rak me ha va Zad a zo UNAN." (Ya 1,18 ; 14,9-11 ; 10,30).

An Tad hag ar Mab en em gar an eil egile gant ur garantez peurglok : "Hemañ eo va Mab muiañ-karet am eus lakaet ennañ va levenez." (Mz 3, 17,21 ; 7,5) "An Tad am c'har hag e



choman en e garantez ; hag e karan an Tad : bepred e ran e vennentez..." (Ya 10, 17 ; 15, 10 ; 14, 31).

Frouezh ar gengarantez eus an Tad hag ar Mab a zo ur garantez peurglok, divent ha solwezel rak dont a ra eus o mennentez peurglok: bez' ez eo bleuñvadur o c'hengarantez doueel. Ar garantez solwezel-se, al liamm a garantez etre an Tad hag ar Mab, kendere gant an Tad hag ar Mab hag a un natur ganto, a zo un trede person doueel : ar Spered Santel, anvet ivez Spered a Garantez.

Bez' e teu ar Spered Santel eus an Tad hag eus ar Mab : "Me," eme ar Mab,"a gaso deoc'h ar Spered a zeu eus an Tad..." (Ya,15,26) Ha sant Paol a lavar : "Kaset en deus Doue Spered e Vab en ho kalonoù..." (Gal 4,6). An Tad hag ar Mab a zic'hwezh ar Garantez,ar Spered a Garantez. Koulskoude e teu ar Spered Santel eus ur bennwrizienn hepken rak kement a zo gant ar Mab a zo en e gerz digant an Tad : "Holl gement a zo din a zo dit-te ; ha kement a zo dit a zo din-me..." (Ya,17,10),zoken ar galloud da broduiñ ar Spered Santel.Ar galloud dic'hwezhañ a zo boutin d'an Tad ha d'ar Mab (ac'hano ar gerioù feizoniel : daou berson a

zo o tic'hwezhañ met un dic'hwezher a zo hepken ; evel ez eus tri ferson doueel met un Doue hepken, tri ferson o krouiñ met ur C'hrouer hepken. Bez' ez eus enta un Doue hepken e tri Ferson : "Hag o-zri a zo unan..." (I Ya, 5-7) ; tri Ferson kendere ha diziforc'h (diziforc'h e-keñver o orin hepken).

Anat eo en em gar Doue eñ e-unan, ez-ret hag ez-divent. O vezañ ar Peurvad e-unan e laka ivez e blijadurezioù en arvestidigezh e beurglokterioù divent hag er youl d'en em stagañ outo gant ur garantez divent. Hogen ar garantez doueel-se n'eo ket emgar : bez' ez eo ur garantez a geneilded hag a hegaratted. Pep hini eus an tri ferson doueel ne soñj nemet en daou all hag a zo unanet dezho en ur garantez parfet. Emaomp o paouez gwelout ez eo kengarantez peurglok an Tad hag ar Mab end-eeun hag a zo orin d'ar Spered Santel, anvet ivez en abeg da se, ar Spered a Garantez. Ha maz eo ar Spered Santel ar garantez-frouezh (frouezh ar gengarantez eus an Tad hag ar Mab) ez eo ivez ar garantez-gra : bez' e kar an Tad hag ar Mab maz eo ar frouezh eus o c'hengarantez. An Doue n'eus nemetañ ez eo tri ferson en un natur hepken, ha tri ferson en em garkenetrezo

gant ur garantez divent.

Peurglok eo Doue ; da lavarout eo, bez' en deus an holl glokterioù a c'hell bezañ, dreistniver hag hep bevonn ebet. N'eus nemetañ : "N'eus ket un Doue all estregedon..." (Iz, 45, 21) Hollzigemmus eo : "Me, Yawe, ne gemman ket." (Mal, 3, 6). Hollbadus eo : "Bev on da viken." (Ad, 32, 40). Krouer eo : "Er penn-kentañ en deus Doue krouet an neñv hag an douar." (Gen 1, 7). Divent eo hag emañ e pep lec'h : "Daoust hag-eñ ne leunian ket an neñv hag an douar?" (Ye, 23, 24) Anavezout a ra an holl, an amzerdremenet, an amzer-vremañ hag an amzer-dazont. "Unan gouiziek eo Yawe." (Sam 2, ") "Hollc'halloudek eo..." (Il, 43, 25). "N'eus netra a vefe trec'h d'e c'halloud..." (Lu, 1, 37). "Bras ha galloudus eo e nerzh, ha d'e furnez n'eus muzul ebet... Seveniñ a ra kement a fell dezhañ..." (Sa, 147, 5 ; 115, "). Mat eo ha trugarezus : "Doue hepken a zo mat..." (Mz, 19, 18). "Ha piv a c'hello danevellañ e drugarezioù?" (Il, 18, 3)

Dre ar skiant-poell ez anavezomp ur peurglokter bennak eus Doue : lakaat a reomp e dalc'h Doue an holl beurglokterioù a weler er c'hrouadurioù rak, da gentañ, emaint er

KARANTEZ EO AN DOUE KROUER

Ennañ e-unan e kav Doue e eurvad divent. Ar Peurvad eo. N'en deus ezhomm eus mad all ebet enta. Ne c'hell tennañ gounid eus tra all ebet. Netra ne c'hell lakaat un dra all bennak da greskiñ e eurvad peogwir ez eo divent e eurvad Treinded. N'en deus ket ezhomm eus ar c'hrouadurioù evit embreger e garantez a zo he finvez en em zougen da unan all koulskoude, rak ennañ e-unan e-unan e kav an obererezh-se : pep hini eus an tri ferson doueel a gar an daou all, hag en un doare divent.

Neuze, daoust hag-eñ e c'hell Doue karout estregetañ ? Daoust hag-eñ e kar e grouadurioù ? Daoust hag-eñ e kar ac'hanomp ? Pep boud a ra un dra bennak dre maz eo rediet, pe dre ma c'hounezo un dra bennak gant se,



pe dre ma tiskouezo evel-se e garantez. N'en deus ket Doue, ar Peurvoud diredi, krouet dre redi, met ez-dizalc'h en deus graet : "Kement a fell da Yawe, henn ober a ra..." (Sa,135,6) Ha gwelet hon eus n'eo ar c'hrouadurioù na ret na talvoudus dezhañ : a-se, ez-dizalc'h eo en deus krouet. "Te an hini eo en deus krouet pep tra, ha dre 'z mennentez int deuet da vezañ..." (Dis.4, 11). "Doue a gas pep tra war-raok diouzh e youl..." (Ef.1,11). "Penaos e c'hellfe un dra bennak derc'hel da vezañ, mar n'az pije ket henn youlet?" (Fu.11,26). Ha ne c'hell bolontez Doue mennout nemet ar pezh a gar : "Karout a rez an holl vodoù ; rak n'az pije ket graet un dra bennak ma 'z pije kasaet anezhañ..." (Fu.11,24). Ur brouenn o tiskouez ez omp karet gant Doue eo hor buhez : hor c'hrouet en deus dre ma kare ac'hanomp dija.

Perzh piaouel ar vadelezh hag ar garantez a zo en em skignañ. Ha divent eo madelezh Doue : "Doue hepken a zo mat..." (Mz.19,18). Douget-dreist eo enta d'en em skignañ ha d'ober vad. An abeg nemetañ evit Doue da vennout krouadurioù ez eo ober dezho kaout lod en e vad : "Va Doue out-te : etre da zaouarn

emañ va flanedenn..." (Sa. 31, 16). Fellout a ra da Zoue kaout krouadurioù, - n'eo ket avat evit degemer un dra bennak diganto, digant an den zoken : "Daoust hag-eñ e c'hell an den bezañ talvoudus da Zoue ? " (Yob 22, 2), met evit reiñ dezho ; evit ober dezho kaout lod en e beurglokterioù divent. Rak-se, seul vui e kar anezho, seul vui ez int mat ha klok enta. Ned eo ket dre maz int mat e venn hag e kar anezho ; mat hag hegarat ez int dre ma venn ha ma kar anezho hag e-keñver ma kar anezho. Ar garantez a zoug Doue d'e grouadurioù eo a ro dezho niver ha derez o c'hlokterioù. "Graet en deus Doue ar re vihan hag ar re vras ha preder a gemer gant an eil re hag ar re all..." (Fu. 6, 7). An den o vezañ ar c'hlokañ eus e grouadurioù a ziskouez dre se end-eeun bezañ karet muioc'h eget an holl grouadurioù all gwelus. "E c'hraet en deus izeloc'hik eget an aelez ; gant gloar ha gant enor en deus e gurunennet..." (Sa.136, 4-9). Karantez Doue hepken a ziskleir ar grouadelezh en hec'h orin: "Burzhudoù en deus graet Doue: an neñv, an douar, ar mor, an avel, an heol, al loar, ar stered,... rak da viken e pad e garantez." (Sa.136, 4-9). Karantez Doue hepken

ivez a ziskleir ar grouadelezh en he fal. N'en deus ket krouet Doue evit tennañ korvo, - dre e vadelezh, evit reiñ ul lodenn eus e beurglokterioù d'ar boudoù en deus tennet eus an netra, ne lavarant ket ! Koulskoude "Doue en deus graet pep tra evitañ..." (La.16, 4). "Pep tra a zo bet krouet drezañ hag evitañ." (Gol.1 16). Evitañ, da lavarout eo, evit e c'hloar. Ar c'hloar-se a zo, da gentañ, diskuliadur peurglokterioù Doue dre e an holl grouadurioù. "An neñvoù a embann gloar Doue hag oberoù e zaouarn en diskleir." (Sa.19, 2). Hogen c'hoarvezout a ra ar c'hloar-se dreist-holl eus anaoudegezh ha meuleudi ar peurglokterioù-se gant ar c'hrouadurioù poellek n'eus nemeto a vefe gouest da anavezout ha da veuliñ ar C'hrouer : "Rak diwar braster ha kaerder ar c'hrouadurioù e c'heller, dre zamheñvelidigezh, anavezout o c'hrouer." (Fu.13, 5).

Hag e-touez ar c'hrouadurioù gwelus, n'eus nemet an den en deus resevet ar c'hrad-vat-se da vezañ donezonet a vez ha da c'hallout enta anavezout, meuliñ ha karout ar C'hrouer. Rak, evel evit an aelez : "Doue en deus roet d'an den ar skiant, ar meizerezh hag ar sklerijenn evit diskouez dezhañ burzhudoù ar grou-

adelezh : neuze e veulo e anv santel hag ez embanno brasterioù e oberoù." (Il.17, 6-10). N'en deus ket Doue ezhomm eus hor meuleudi ha na zegas netra d'e glod diabarzh a zo divent ; met ar c'hlod rentet da Zoue gant ar c'hrouadurioù a ra war un dro eurvad ar c'hrouadurioù poellek ; an anaoudegezh hag ar veuleudi-se a unvan ac'hanomp gant Doue "maz omp graet evitañ..." (I Ko.8, 6). O tizhout evel-se hor pal, Doue, ar Peurvad divent, e kavomp hon eurvad ennañ : "N'eus eurvad ebet evidomp nemet ennout, Aotroù." (Sa.16, 2).

Hor c'hrouet en deus Doue dre e garantez hag evit e garantez, - evit ma karimp anezhañ ha ma c'hello-eñ evel-se hor c'harout hag hol lakaat da vezañ evurus : "Eñ eo a leugn da vuhez gant madoù e-leizh ; eñ eo az kurunenn gant gras ha trugarez. Rak ouzh an holl eo mat an Aotroù ha trugarezus e-keñver e holl grouadurioù." (Sa.103, 4-5 ; 145, 9). Hogen e drugarezioù a ya dreist-holl d'an den.

An heñvelidigezh a zegas ar garantez. Ha seul vrasoc'h e vez an heñvelidigezh, seul virvidikoc'h ivez ar garantez. Hag o reiñ dezhañ un ene speredek, poellek ha divarvel "en deus Doue graet an den diouzh e skeudenn hag

e heñvelidigezh." (Gen.1, 26). Er bed gwelus ez eo an den, neket hepken ar boud nemetañ gouest da anavezout Doue met, ouzhpenn, ez eus anezhañ ar poltred gwirion hag ar skeudenn glokañ eus ar c'hrouer. En abeg da se c'hoazh e kar Doue anden kalz muioc'h eget ar c'hrouadurioù gwelus all ; hag e fell dezhañ e lakaat da vezañ evurus. "Karout a ran ar re am c'har..." (La.8, 17). An den, enta, a c'hell hag a zle karout e Grouer.

"Koulskoude," emezomp gant Yob, "e ren an den war an douar ur vuhez verr hag azrec'hus - hep dinec'h na peoc'h na diskuizh, karget avat a drubuilhoù hag a zrougoù..." (Yob,7, 1, 14).

Neuze, ma hor c'har Doue kement, daoust hag-eñ n'en devefe ket gellet krouiñ ur bed gwelloc'h ha, dreist-holl, un natur-den klokoc'h hag evurusoc'h ? Gellet en devefe ober se, anat eo. Hogen an dalc'h a chomfe memestra. Pegen bras bennak e vefe kloker ar grouadelezh e c'hellfemp-ni he c'hoantaat brasoc'h c'hoazh : ur dra grouet ne c'hell ket bezañ na divent na disi : bepred e c'heller kreskiñ e gloker. En ur grouiñ e tlee Doue mennout an derez a c'hloar a zlefe ar c'hrouadurioù degas

dezhañ, ha merkañ enta an derez a glokter da reiñ da bep hini, ha d'an den dreist-holl.

Ha kement en deus roet d'e grouadurioù en deus henn roet dre vadelezh; rak ne zlee netra en holl dezho, na d'an den na d'ar boudoù all. Neuze, "ô Den, piv out-te enta evit tabutal gant Doue ? Hag-eñ e lavaro ar pod-pri d'an hini en deus e stummet : 'Perak hoc'h eus graet ac'hanon e-giz-se ?' Hag-eñ n'en deus ket ar poder ar gwir d'ober eus an hevelep danvez ul lestr pompadus pe ul lestr ordinal?" (Rm.9, 20-21). Ha soñjomp en devefe gallet Doue krouiñ ur bed disteroc'h, o reiñ nebeutoc'h a spered hag a ziseurtiezh d'an den.

Gallout a c'hallfemp ivez lavarout gant Yob: "Mar hon eus degemeret ar madoù digant dorn an Aotroù, perak ne zegemerfemp ket an drougoù ? " (Yob 2, 10). Marteze ez eo se en tuhont d'hor c'hadarnded? Anavezomp da nebeutañ e tellezomp ervat an drougoù m'emaomp dindan o bec'h en abeg d'hor pec'hedoù, hon diouer a garantez hag a anaoudegezh-vat.

~~~~~

KARANTEZ EO  
AN DOUE DISMEGANSET

Poan hon eus, marteze, da soñjal evel Yob. Hogen gallout a c'hallomp da nebeutañ goulenn ouzhimp : mar n'omp ket evurusoc'h, piv a zo kiriek ? Ar boan hag ar marv a zo tonkadur naturel pep boud danvezel. Koulskoude, dre vadelezh en devoa Doue diwallet an den diuto met war an diviz ma chomfe leal : "An deiz ma tebrfes eus frouezh ar wezenn-mañ e varvfes." (Gen.2, 17). Krouet dre garantez hag evit ar garantez en em sav an Den a-enep d'e Grouer en deus e garget a vadoù! Pec'hiñ a ra Adam: kastizet e vo rak ar reizhded doueel a rank derc'hel d'he ger ha kastizañ an hini kablus: "Peogwir ac'h eus pec'het e kreskin da boan-nioù ; diouzh c'hwezenn da dal e tebri bara kent ma tistroi d'an douar." (Gen.3, 16-18). "Doue n'en deus ket graet ar marv." (Fu.1,13) Evel an holl zrougoù : "gopr ar pec'hed eo ar

marv." (Rm.6, 23).

Ma vije Adam chomet feal da Zoue n'en devije anavezet nag ar boan nag ar marv. A-youl avat en deus torret an darempred gant Doue : neuze en deus kollet e vrientoù ha n'en deus ket gellet o dasreiñ deomp !

Met "an drougiezh ne blij ket da Zoue..." (Sa.5, 5). En enep, "trugarezus ha truezus eo Doue, gorrek da gounnariñ ha pinvidik e madelezh, ha keuz en devez d'an droug." (Jo.2, 13). Pa ziskleir an Den ez eo e enebour dre ar pec'hed, zoken, - bepred e kar Doue anezhañ rak "leun a zivuanegzh eo Doue, ha bras e garantez..." (Sa.103, 8), ken en em ziskouez trugarez Doue, d'ar c'houlz ma toug ar varnedigezh end-eeun, dre lezel dalc'hmat ur skleurig a silvidigezh da zamwelout. "Enebiezh a lakain etrezout - an tempter - hag ar wreg, etre da ziskennadur hag he diskennadur; hemañ a flastro da benn." (Gen.3, 13).

Kent e ziskar en deveze an den darempredoù tener gant e Grouer ; alies ha diardoù e komze outañ. Goude an diskar avat e vezo an darempredoù-se etre ar C'hrouer hag an den dibaotoc'h ha disheñvel-tre. Padal en em gevred Doue gant diskennidi Adam hag e tibab



eus o c'hreiz evitañ ur bobl gwarezet ha kennet gantañ, ur bobl ma vo ganet enni ur Salver. Goude bezañ salvet Noah e c'halv Doue Abraham ; gwareziñ a ra Yakob, gervel Moizez "ma komze outañ dremm-ouzh-dremm, evel ma komz un den ouzh un den." (Er.33, 11).

Hogen hed-ha-hed an Testamant Kozh e welomp e vez ar bobl dibabet alies dic'hradenkañ. Neuze e vez gourdrouzet gant Doue ha kastizet a-wechoù gantañ evit ma vo digoret he daoulagad ha degaset en-dro war an hent mat. Nepred ne vez dilezet gantañ : "Hon tadoù a nac'has sentiñ ; met Doue an drugarez out-te, pinvidik e madelezh : n'ac'h eus ket o dilezet ..." (Ne.19, 17)

Kerkent ha roet an disterañ merk a geuz hag a zistro e vez lamet hag ankouaet an holl bec'hedoù : "Paouez a gaout droug en hor c'heñver : diskouez dimp da drugarez." (Sa.85 5,8). "Dont a reomp dit rak te a zo Yawe, hon Doue, ha pec'het hon eus ez keñver." (Ye.3, 22 & 25). "Distro, avat, Yawe ; perak daleañ ? Bez leun a druez ouzh da servijerion." (Sa.90, Neuze, pardoniñ hag ankouaat a ra Doue. "Diverket em eus ho trougoberoù evel ur goabrenn; rak em c'harantez peurbad em eus truez ouzhoc'h..."

(Iz.44, 84 ; 54, 8). "Ne gemeran ket plijadur diouzh marv ar pec'her, hogen diouzh ma tro ouzhin ha ma vev..." (Ez.18, 32). "Ha levenez a zo en neñvoù evit ur pec'her oc'h ober pini-jenn..." (Lu.15, 7) "An Aotrou a zo truezus ha trugarezus ; pardonin a ra ar pec'hedoù. Ya, pegen bras eo trugarez an Aotrou, hag e vadelezh ouzh ar re a dro outañ!" (La.2, 11 ; 17, 29).

Ouzhpenn, gant e drugarez e vez daleet red e varnerezh rak amzer a fell dezhañ reiñ d'ar bec'herion da dreiñ outañ ha da dizhout o fardon : "Serriñ a rez da zaoulagad ouzh pec'hedoù an dud evit ma tistroint diouto. Setu perak ez eo tamm-ha-tamm e kastizez ar re a gouezh ; reiñ a rez kemenn dezho en ur ziskouez dezho e petra e pec'hont evit m'en em zistroint diouzh an droug ha ma kredint ennout..." (Fu.11, 23 ; 12, 2). Ya, "tro-ha-tro e kastiz hag e pardon... Distroit dezhañ : trugarez a raio..." (To.13, 2,6); rak"trugarezus eo an Aotrou, ha truezus, leun a basianted hag a vadelezh." (Jo.2, 13). "Pasianted a ziskouez e-keñver an holl dre ma ne fell ket dezhañ ez afe den ebet da goll, met er c'hontrol e fell dezhañ e trofe an holl d'ober pini-

jenn..." (II Pêr.3, 9). Ha diheskus e hañval bezañ e basianted. Ne ra e zisentez da lezel kabestr gant e varnedigezh nemet goude hir amzer : "Da garet em eus gant ur garantez peurbadus; rak-se em eus astennet va zrugarez evidout." (Ye.31, 3). Evit gwir "gouzañvet en deus Doue gant kalz a basianted listri a gounnar prest da vont da goll." (Rm.9, 22) En amzer Noah, hir amzer adarre eo e c'hortoz Doue a-raok kastizañ fallagriezh an dud dre al liñvadenn-veur. "Pa welas Doue Niniviz o tistreñ diwar o hent fallakr en devoe keuz d'an droug en devoa lavaret e raje, ha n'en greas ket..." (Yo.3, 10). A-hend-all ez eo levr Yona penn-da-benn un danevell a garantez. "Lavarout a ra David : 'Pec'het em eus!' - 'Yawe a lezo a-gostez da bec'hed', a lavar Natan." (II Sam.12, 13). Parabolennoù an dreog hag ar mab foran a ziskouez deomp gant pebezh pasianted e c'hortoz Doue distro ar pec'her.

N'eo ket a-walc'h gant Doue gortoz avat ; aspediñ a ra ar pec'her da zistreñ : "Deuit da vreutaat ganin. Na pa ve ho pec'hedoù evel skarleg e teuint da vezañ gwenn evel erc'h ; na pa vefent ruz evel limestra e teuint da vezañ evel gloan." (Iz.1, 18). Neuze, "distro

ouzhin, te an hini disent, ha n'am bo ken evidout un dremm c'harv, rak trugarezus on : anzav hepken da zrougiezh." (Ye.3, 11-12).

Parabolennoù an diner ezaouet hag an dañvad kollet a ziskouez ivez gant pebezh preder e klask Doue an dro da zistreiñ ar pec'her outañ.

An aprou ne vez ket bepred ur c'hastiz, na dreist-holl kospadur ur pec'hed personel. En eneb e vez alies ur c'hras, un hent da dostaat ouzh Doue ha d'en em adunvaniñ gantañ. Un testeni a garantez ez eo enta. Kounnar Doue - pe, kentoc'h, ar pezh a anvomp'kounnar Doue' - a zo un doare eus e garantez hag eus e drugarez e-keñver ar re na gomprenont nemet ar gwalleur. N'eo na dre blijadur na dre zroukrañs e lez Doue ar gwalleur da gouezhañ war an den ; dre garantez, ne lavaran ket, evit lakaat da brederiañ, evit degas ar c'heuz hag an distro, evit gallout pardonniñ d'ar re gablus ha salviñ anezho : "Evurus an den a zalc'h penn e-kreiz an aprou ! Rak resev a raio ar gurunenn a vuhez en deus prometet Doue d'ar re a gar anezhañ." (Ja.1, 12). Mar befe an den re evurus war an douar en em stagfe outañ hag ez ankouafe e donkadur, e



vuhez da-zont gant Doue. "En e enkrez avat e klasko war-lerc'h Doue" (Oz.3, 5) : holl istor Pobl Israel a ziskouez an dra-se ; pa ne se-laou ket ar brofeded kaset gant Doue e tilamm ar gwalleur warni. Neuze e kompren, e sav keuz dezhi hag e tistro ouzh Doue. P'emañ enk warnañ eo e tistro ar Mab Foran. Ha pegement a dud a anzav o devije troet kein ouzh Doue pe na vijent ket distroet outañ paneve e oa c'hoarvezet ganto an aprou-mañ-aprou."N'eo ket dial a denn Doue ac'hanomp ; kentoc'h avat e ro deomp ur c'hemenn ma sko gantañ ar re nesañ dezhañ." (Yu.8, 22-23). Trugarez Doue a bleg da skeiñ gant an aprou evel ma rafe gant ul louzoù. "Evit distreiñ an den diwar e oberoù, evit salviñ e ene, e kastiz Doue anezhañ war e wele a boan. Ya, evurus an den a zo kastizet gant Doue..." (Yob,33, 17-19 ; 5,7) "Kompren enta e kastiz Doue evel ma kastiz un den e vab." (Ad.8, 5). N'eo ket evit e blijadur e kastiz an tad, met evit mad e vugel.

"Daoust hag ankouaet hoc'h eus an ali roet deoc'h evel da vibion : 'Va mab, na ra ket fae war gastiz an Aotroù ; na goll ket kalon mar rebech ac'hanout ; rak an Aotroù a gastiz an neb a vez karet gantañ, hag a skourjez an

neb a vez kemeret gantañ da vab.' M'hoc'h eus da c'houzañv ez eo evit ho kelennadurezh. Evel ouzh mibion e ra Doue ouzhoc'h. Rak piv eo ar mab ha na vez ket kastizet gant e dad ...? Mar bezit enta diskarg diouzh ar c'hastiz en deus pep hini lod ennañ, ez oc'h neuze besterd ha n'eo ket mibion. Ouzhpenn-se, hag-eñ n'o deus ket hon tadoù hervez ar gwad kastizet ac'hanomp, Ha koulskoude hon eus doujañs outo. Na pegen muioc'h neuze ne zleomp ket sentiñ ouzh Tad ar speredoù evit kaout ar vuhez ? Hon tadoù, int-i, hor c'hastize hag hon adresse evit un nebeut deizioù hag hervez ma kave dezho. Doue avat hor c'hastiz evit hor brasañ mad, evit m'hor bo perzh en e santelezh. Pep kastiz-kelenn a hañval, a-drasur, d'ar c'houlz ma vez gouzañvet, bezañ un abeg a dristidigezh ha neket a levenez. Met diwezhatoc'h e tegas d'ar re a zo bet stummet gantañ urfrouezh peoc'hus a reizhder." (He.12, 3-11). "Kement skourr a zoug frouezh, henn krennañ a ra va Zad evit ma tougo muioc'h." (Ya.15, 2). Anat eo ez eo poanius ar benerezh - madelezh eo avat !

N'hon eus ket da deurel ar bec'h war hor c'herent kentañ rak ni ivez hon eus pec'het.

Neuze "an Aotrou a denn kastiz evit hon holl bec'hedoù..." (I De.4, 4). "Ober a ra justis ha reiñ digoll." (Rm.4, 19). Justis eo ; ha koulskoude en deus Doue truez ouzhimp hag en em ziskouez a ra damantus : "Mar fellfe da Zoue komz e welfes ez ankoua ul lod eus da dorfedoù..." (Yob,11, 5-6). "Na ra ket dimp hervez hor mankoù ; na rent ket dimp hervez hor pec'hedoù..." (Sa.103, 10)

A-hend-all, kalz gwalloù a vez o tont a-ziwar-lerc'h an abuzionoù, ar c'hoantegezhioù, fallentez an dud ; adkouezhañ a ra ar seurt heuliadoù war ar re gablus moarvat met ivez war ar re zigablus, dreist-holl war ar vugale. Gwashañ enebour an den eo an den : "An den eo a engehent ar boan, an droug, ar gwalleur hag a zoug ennañ ur frouezhenn a gerseenn..." (Yob 5, 7 ; 15,35) : ar vezventi, an dramm, ar c'hadaliezh, ar re-labour, ar youl da c'hounit bepred muioc'h h.a.a rivin e yec'hed. Al laeroñsioù, an torfedoù, al lazhoù-bugale h.a. a blant en e greiz kalonad, mezha morc'hed, - an dic'hoanag en diwezh. Hag an holl zrougoù-se koulz hag ar brezelioù, ar vilderioù a bep seurt a zo kiriek da galz gwalleurioù gouzañvet gant tud digablus.



Bez' ez eus ivez gwallreuzioù-natur: krenoù-douar, dic'hlannoù-dour, barradoù-amzer : disac'hadurioù-erc'h ha na vije ket anezho pe n'o dije ket gallet tizhout an den kent ar pec'hed.

"A, Mar bije un Doue bennak, mar bije mat, n'aotreje ket an holl walenoù-se a sko tud digablus," a glevomp a-wechoù. Mar o deus ar gwalenoù-se un abeg-natur ez eo ret derc'hel koun en deus ar pec'hed reveulziet raktresoù ar C'hrouer ha graet eus an den ur boud gloazidik. Mar o deus ar gwalenoù-se da abeg fallagriezh pe, da nebeutañ, dievezhded ha dizamantiz an dud, arabat eo ankouaat en deus Doue roet ar frankiz d'an den hag ez eo henezh a wallimplij anezhi : "Setu ma lakaan dirazoc'h bennozh ha mallozh, eurvad ha gwalleur - bennozh hag eurvad mar sentit ouzh gourc'hemenoù Yawe ho Toue, a gemennan deoc'h; mallozh ha gwalleur mar ne sentit ket ouzh gourc'hemenoù Yawe ho Toue ha ma kuitait an hent a c'hourc'hemennan deoc'h." (Ad.11, 2-29; 30, 15)

Herzel a ra Doue ouzh kalz drougoù hag an dud ne daolont ket evezh ! Evit herzel ouzh an holl e rankfe Doue lemel holl heuliadoù ar

pec'hed hag hualañ frankiz an den pe ober milionoù a vurzudoù ; hag ar re a gomz evel-se n'int ket dibec'h, pell emañ ; ne reont ket bepred ervat gant o frankiz, ha peurliesañ... e tiskredont war ar burzudoù !

~~~~~


KARANTEZ EO
AN DOUE SALVER

Anezhañ e-unan e pella ar pec'her diouzh Doue ; hag ouzh ar pec'her hepken e noaz ar pec'hed. Gellet ha dleet enta en devije Doue dilezel an den en e bec'hed hag en efedoù anezhañ : "Petra eo an den ma soñjez ennañ? Petra eo mab Adam m'ac'h eus soursi anezhañ? ..." (Sa.103, 8). Hogen bepred e kar Doue an dud, goude ma vefent kablus. "Trugarezus ha truezus eo an Aotrou..." (Sa.103, 8). "Ned eo ket marv ar pec'her a blij dezhañ." (Ez.33,11) Hogen ar Justis a c'houlenn un digoll ; rak ur falloni hogos divent eo ar pec'hed : un disme-gañs eo ouzh meurdez divent Doue, hag e tistruj en den donezon dreistmuzul ar c'hras. A-se "ne c'hell den ebet reiñ da Zoue an dic'haou na paeañ dezhañ priz e zaspren..." (Sa.49, 8).

Doue hepken a zo divent. Met, ha gellout a c'hell Doue en em lakaat e lec'h ar pec'her ?



N'eo ket d'an hini dismegañset digoll an dismegañs : "An hini en deus pec'het, hennezh eo a varvo." (Ez.18, 20) A-hend-all, dic'houzañvidik eo Doue : ne c'hell enta na gouzañv na digoll. Koulskoude e kav ar Furnez peurbadel an tu d'unaniñ he reizhded divent hag he Zrugarez divent "en ur gas he Mab e-unan en ur c'horf heñvel ouzh hini ar pec'hed" (Rm.8, 3).

Diskouezet en deus Doue e vadelezh hag e garantez evidomp en ur salviñ ac'hanomp, n'eo ket en abeg d'an oberoù a reizhder hor bije graet, met diwar doug e drugarez." (Ti.3, 4). Ha pegeit he deus e zouget e vadelezh , "Betek kas er bed e Vab unganet evit hor salviñ. En dra-se emañ e garantez : n'eo ket ni hon eus karet Doue, met eñ eo en deus karet ac'hanomp ha kaset e Vab da vezañ lazhet evit dic'haou ar pec'hedoù" (I Ya.4, 9-10), rak n'en deus ket e espernet met e roet en deus d'ar marv evidomp holl. Ha diwar-bouez goulioù an Aotrou Krist eo ez omp bet yac'haet." (Iz.53, 6,5).

Ha koulskoude ne c'houneze Doue netra ouzh hor salviñ, dreist-holl d'hevelep priz ; henn graet en deus dre garantez hepken : "Doue, a zo pinvidik e drugarez, en deus hor salvet dre

ar garantez vras en deus hor c'haret ganti." (Ef.2, 4). Ha "pardonet en deus hon holl be-c'hedoù" (Gal.3, 13), rak "n'en deus ket kaset e Vab er bed evit barn ar bed, met evit ma vo salvet ar bed drezañ." (Ya.3, 16)

"Kement en deus an Tad karet an dud, ken en deus roet e Vab unganet evit o salviñ." (Ya.3, 16). Ar pezh a dalv da lavarout : ar Mab, eñ ivez, en deus hor c'haret dre ur garantez tragouezel ha divuzul, heñvel ouzh hini an Tad. "Evel m'en deus an Tad ho karet, me ivez em eus ho karet." (Ya.17, 23). "Roet em eus va buhez evit ma vint salvet, "ha n'eus ket brasoc'h karantez eget reiñ e vuhez evit e garidi..." (Ya.14, 13).

Leun a sentidigezh e-keñver an Tad hag a drugarez e-keñver an dud, en deus kavet mat ar Mab en em ober unan ac'hanomp : "Ober da youl, ô Tad, eo va holl zudi." (Sa.40, 9). Neuze "ez eo deuet ar Verb da vezañ korf" (Ya.1, 14)

An emzenadur a oa an diskoulm misterius n'eus nemetañ. Gouzañv a c'hell an Aotroù Krist, paz eo den; ha peogwirez eo Doue o devo e boanioù hag e zigolloù un dalvoudegezh divent. (** kv. ar c'hendalc'h : p.45)

Drezañ e-unan ez eo emzenadur Mab Doue ur mad evit an dud. Rak, maz eo eus e berzh un hegaratter dreistmeiz, ez eo evit an den ur briekadur dic'hortoz ha diempentadus. Warbouez bezañ ganet eus ur vaouez a ouenn ganeomp e teu Doue da vezañ eus hor familh. Oc'h en em izelaat betek an dud ez uhela an den betek ennañ. Dre antren en hon denelezh, warbouez bout lodek enni, dre he fiaouañ, e toueela Doue anezhi. An Aotroù Krist hor c'hevred gantañ hag e teuomp da vezañ e izili : "C'hwi a zo izili an Aotroù Krist (hag-eñ n'ouzoc'h ket ez eo ho korfoù izili ar C'hrist) ...?" (I.Kor.6., 15) E vuhez a zeu da vezañ hon hini. "Emañ an Aotroù Krist o chom en ho kalonoù..." (Ef.3, 16) Kemer a ra hor buhez evit reiñ e hini deomp. "Me a zo deuet evit m'o devezo ar vuhez hag m'o devezo-hi ent fonnus..." (Ya.10, 10). Doue a zeu da vezañ den evit ma teuo an den da vezañ Doue.

An emzenadur a zo un testenì eus karantez divent ar Mab : "Eñ hag a oa Doue a stumm, ne sellas ket evel e dra chom en e renk, par da Zoue ; met da netra eo en em lakaet dre gemer stumm ar servijer ha dont da vezañ e-giz an dud..." (Fl.4, 6-7). "Da netra en deus

en em lakaet dre gemer stumm ar servijer ha dont da vezañ e-giz an dud..." (FI.4, 6-7). "Da netra en deus en em lakaet," eme sant Paol. Ha kompren a reer n'eo ket re-lavarout pa seller da vat ouzh ar c'hemm divent a zo etre Doue hag an den. "Ha Doue n'en deus ket espernet e Vab e-unan..." (RM.8, 11). Eveldomp, ha muioc'h zoken egedomp en deus anavezet reuzeudigezhioù ar bed-mañ. "An hini na c'hell ket bezañ dalc'het gant an neñvoù" (I RM.8, 27) a zeu da vezañ den en ur groueell-den "a zeu da vezañ an tamm kig-se..." (YA.1, 14), "a zo bet ganet war ar plouz ha lakaet en e c'hourvez en ur prezeb..." (LU.2, 7), "a sent ouzh lezenn an amdroc'hadur hag an daspren..." (LU.2, 21-22), a reuz ouzh krizder an harlu en Ejipt hag al labour e Nazared (MZ.3, 13-23), an naon hag ar sec'hed, ar skuizhder... E-pad e vuhez abostol ez anavez an diseblantted, an dismeg, ar gasoni, ar c'hunujennoù : "Niverusoc'h eget blev va fenn eo va enebourion a vag ouzhin kasoni hep abeg ! A-hed an deiz ez itrikont ouzhin komzoù flemmus, o holl vennozioù a ijin va gwalleur ; en em strollañ a reont e kuzh evit spiañ va c'hammedoù, rak va buhez an hini eo a glaskont diskar..." (SA.69, 3 ; 56,

5-7). E enebourion a ra anezhañ ur pec'her, un treuzkredenner, un touer-Doue, un diaoulad, un diskiant, ul lonteg, ul lonker-gwin... Klask a reont e labezañ. Nag a gersennoù a-berzh e re na gomprenont ket emañ unan anezho o vont d'e werzhañ d'e enebourion !

Hag e-kreiz ar gasoni-se "e tremene Jezuz oc'h ober ar mad..." (OB.10, 28). Ar garantez eo Jezuz peogwir ez eo Doue ; met "bez' ez eo ar garantez-Doue o tremen dre ur galon-den," Ur galon a anavez ervat hon holl reuzeudigezhioù, "aprouet e pep tra eveldomp..." (HE.4, 75) ; ur galon gouest enta da gompren hor gwalleurioù ha da drueziñ outo "rak, o vezañ m'en deus e-unan gouzañvet an aprou e c'hell skoazellañ ar re a vez aprouet..." (OB.2, 18). Hag evit gwir ez eo bet teneraet gant hon holl boanioù, "o pareañ kement kleñved ha kement langis a zo..." (MZ.4, 23).

A-hed an Aviel e tarzha madelezh Jezuz. "Ur maread tud a dosta outañ, o tegas tud kamm, mut, mac'hagnet, ha kalz a glañvourion all a bep seurt... O lakaat a ra e-harz e dreid hag e pare anezho : an dud dall a wel ; ar re gamm a gerzh ; ar re lovr a vez glanaet ; ar re vouzar a glev ; ar re varv a adsav da vev

hag ar re baour a zo kemennet dezho ar C'he-
loù Mat..." (MZ.15, 30 ; 11, 5).

Finvez an holl vurzHUDoù-se a zo prouïñ
doueelezh Jezuz. Hogen hogos bepred e vezont
mennet gant e vadelezh hag e druez ouzh ar re
ankeniet.

Daoust ha n'eo ket evit mirout na vije me-
zhekaet an dud nevez ma oa bet pedet d'o
friko en deus graet e Kana e vurzHUD kentañ ?
Pebezh kizidigezh evit plediñ gant ken dister
munud eus buhez un tiegezh! Ha pebezh brokus-
ted : pemp pe c'hwec'h-kant litrad a win eus
an dibab !

Esmaeañ a ra ouzh hon holl boanioù hag a
laka anezhañ da ouelañ a-wechoù. Un den lovr
a lavar dezhañ : "Mar fell dit e c'hellez va
glanaat!" O kemer truez e stok Jezuz kentizh
outañ en ur lavarout : "Me a fell din : bez
glanaet!" Ha raktal ez eo glanaet an den lovr
..." (MA,8, 41-42). Deiz kreskidigezh ar bara,
pa dap douar o tiskenn eus ar vag, e wel un
engroez bras a dud ; truez en deus outo ha
pareañ a ra ar re glañv..." (MZ.14,13). "Truez
am eus ouzh ar bobl-se rak tri devezh zo dija
ma chomont ganin, ha n'o deus ket peadra da
zebriñ; ne fell ket din o c'has kuit war yun!"

5-7). E enebourion a ra anezhañ ur pec'her, un
treuzkredenner, un touer-Doue, un diaoulad, un
diskiant, ul lonteg, ul lonker-gwin... Klask a
reont e labezañ. Nag a gerseenoù a-berzh e
re na gomprenont ket emañ unan anezho o vont
d'e werzhañ d'e enebourion !

Hag e-kreiz ar gasoni-se "e tremene Jezuz
oc'h ober ar mad..." (OB.10, 28). Ar garantez
eo Jezuz peogwir ez eo Doue ; met "bez' ez eo
ar garantez-Doue o tremen dre ur galon-den,"
Ur galon a anavez ervat hon holl reuzeudige-
zhioù, "aprouet e pep tra evel domp..." (HE.4,
75) ; ur galon gouest enta da gompren hor
gwalleurioù ha da drueziñ outo "rak, o vezañ
m'en deus e-unan gouzañvet an aprou e c'hell
skoazellañ ar re a vez aprouet..." (OB.2, 18).
Hag evit gwir ez eo bet teneraet gant hon holl
boanioù, "o pareañ kement kleñved ha kement
langis a zo..." (MZ,4, 23).

A-hed an Aviel e tarzH madelezh Jezuz. "Ur
maread tud a dosta outañ, o tegas tud kamm,
mut, mac'hagnet, ha kalz a glañvourion all a
bep seurt... O lakaat a ra e-harz e dreid hag
e pare anezho : an dud dall a wel ; ar re
gamm a gerzh ; ar re lovr a vez glanaet ; ar
re vouzar a glev ; ar re varv a adsav da vev

5-7). E enebourion a ra anezhañ ur pec'her, un treuzkredenner, un touer-Doue, un diaoulad, un diskiant, ul lonteg, ul lonker-gwin... Klask a reont e labezañ. Nag a gerseennoù a-berzh e re na gomprenont ket emañ unan anezho o vont d'e werzhañ d'e enebourion !

Hag e-kreiz ar gasoni-se "e tremene Jezuz oc'h ober ar mad..." (OB.10, 28). Ar garantez eo Jezuz peogwir ez eo Doue ; met "bez' ez eo ar garantez-Doue o tremen dre ur galon-den," Ur galon a anavez ervat hon holl reuzeudigezhioù, "aprouet e pep tra evelomp..." (HE.4, 75) ; ur galon gouest enta da gompren hor gwalleurioù ha da drueziñ outo "rak, o vezañ m'en deus e-unan gouzañvet an aprou e c'hell skoazellañ ar re a vez aprouet..." (OB.2, 18). Hag evit gwir ez eo bet teneraet gant hon holl boanioù, "o pareañ kement kleñved ha kement langis a zo..." (MZ.4, 23).

A-hed an Aviel e tarzh madelezh Jezuz. "Ur maread tud a dosta outañ, o tegas tud kamm, mut, mac'hagnet, ha kalz a glañvourion all a bep seurt... O lakaat a ra e-harz e dreid hag e pare anezho : an dud dall a wel ; ar re gamm a gerzh ; ar re lovr a vez glanaet ; ar re vouzar a glev ; ar re varv a adsav da vev

hag ar re baour a zo kemennet dezho ar C'he-
loù Mat..." (MZ.15, 30 ; 11, 5).

Finvez an holl vuzhudoù-se a zo prouñ
doueelezh Jezuz. Hogen hogos bepred e vezont
mennet gant e vadelezh hag e druvez ouzh ar re
ankeniet.

Daoust ha n'eo ket evit mirout na vije me-
zhekaet an dud nevez ma oa bet pedet d'o
friko en deus graet e Kana e vuzhud kentañ ?
Pebezh kizidigezh evit plediñ gant ken dister
munud eus buhez un tiegezh! Ha pebezh brokus-
ted : pemp pe c'hwec'h-kant litrad a win eus
an dibab !

Esmaeañ a ra ouzh hon holl boanioù hag a
laka anezhañ da ouelañ a-wechoù. Un den lovr
a lavar dezhañ : "Mar fell dit e c'hellez va
glanaat!" O kemer truez e stok Jezuz kentizh
outañ en ur lavarout : "Me a fell din : bez
glanaet!" Ha raktal ez eo glanaet an den lovr
..." (MA,8, 41-42). Deiz kreskidigezh ar bara,
pa dap douar o tiskenn eus ar vag, e wel un
engroez bras a dud ; truez en deus outo ha
pareañ a ra ar re glañv..." (MZ.14,13). "Truez
am eus ouzh ar bobl-se rak tri devezh zo dija
ma chomont ganin, ha n'o deus ket peadra da
zebriñ; ne fell ket din o c'has kuit war yun!"



Ha neuze, setu burzhud an eil kreskidigezh-
vara. E-kichen Yeriko e c'houlenn daou zen
dall bezañ pareet. "Fromet gant an druez e
stok ouzh o daoulagad ha raktal e welont...
(MZ.20, 33). "E-kichen Naim emeur o kas d'ar
bez unan marv, mab pennhêr un intañvez.
Truez en deus outi bepred hag ober a ra d'an
den yaouank sevelavarv da vev..." (LU.7, 12-
15). Pa wel c'hoarezed Lazar o tifronkañ e
ouel e-unan... "Lazar, deus er-maez!" Ha di-
ouzhtu e teu er-maez an hini marv. (YA.11,
32-44). Gouelañ a ra war Jeruzalem."Pet gwech
ez eo bet fellet din dastum da vugale, evel ma
tastum ar vamm-yar he foñsined dindan he
divaskell ! Ha n'eo ket bet fellet dit ! " (MZ.
23, 37). Ha ret e vefe gwelout e jestroù hag e
zremm lirzhine-pad eured Kana ha kalz degoue-
zhioù all. Evel-se e kaver garv e respont d'ar
Sirofenikadez : "N'eo ket mat kemer bara ar
vugale evit e deurel d'ar chas bihan." (MA.7,
27). Ret eo kounañ en em lakae ar Yuzevion da
vugale Doue nemeto hag ez anvent chas an es-
trenion, ar baganed. Ar ger "bihan" implijet
gant Jezuz a habaska an doare-lavar-se, hag
e vouse'hoarzh a ra anezhañ ur garchennerezh
dizrouk.

Ned eo ket a-walc'h da drugarez Jezuz pareañ ar re glañv, adsevel ar re varv da vev, frealziñ ar re enkrezet. D'ar bec'herion ivez ez astenn e drugarez. Rak, emezañ, "n'on ket deuet evit barn ar bed met evit salviñ ar bed ..." (YA.12, 47), "evit salviñ ar pezh a oa kollet." (LU.19, 10). Rak-se, d'ar bihanañ merk a geuz, e ro an distaol. Glebiañ a ra ur bec'herez e dreid gant he daeroù hag o se-c'hiñ gant he blev: "Pardonet eo da bec'hedoù," emezañ d'ar vaouez. (LU.,7, 36-48). Pardonin a ra d'ar wreg avoultrerez. "Me kennebeut n'az kondaonin ket." (YA.8, 12). "Pardonet eo da bec'hedoù," a lavar d'an den seizet e izili. (MZ.9, 2). Ha da bet all e ro ar pardon, da Zac'he ha me 'oar-me !

E enebourion, anat eo, a gav abeg en e emzalc'h. "Hennezh a zegemer ar bec'herion." (LU.15, 2). Hag-eñ da respont : "N'eo ket ar re yac'h o deus ezhomm eus ar medisin, met ar re glañv. Kit eta da zeskiñ petra eo ar gomz-mañ |lavaret gant ar Profed Ozeas| : "An drugarez eo a glaskan, ha n'eo ket ar brofadenn ... Rak-se n'on ket deuet da c'hervel ar re reizh met ar bec'herion..." (MZ.9, 12-13). Ha neuze e tispleg dezho teir farabolenn an dru-

Ha neuze, setu burzhud an eil kreskidigezh-vara. E-kichen Yeriko e c'houlenn daou zen dall bezañ paret. "Fromet gant an druez e stok ouzh o daoulagad ha raktal e welont..." (MZ.20, 33). "E-kichen Naim emeur o kas d'ar bez unan marv, mab pennhêr un intañvez. Truez en deus outi bepred hag ober a ra d'an den yaouank sevelavarv da vev..." (LU.7, 12-15). Pa wel c'hoarezed Lazar o tifronkañ e ouel e-unan... "Lazar, deus er-maez!" Ha diouzhtu e teu er-maez an hini marv. (YA.11, 32-44). Gouelañ a ra war Jeruzalem. "Pet gwech ez eo bet fellet din dastum da vugale, evel ma tastum ar vamm-yar he foñsined dindan he divaskell ! Ha n'eo ket bet fellet dit ! " (MZ. 23, 37). Ha ret e vefe gwelout e jestroù hag e zremm lirzhine-pad eured Kana ha kalz degouezhioù all. Evel-se e kaver garv e respont d'ar Sirofenikadez : "N'eo ket mat kemer bara ar vugale evit e deurel d'ar chas bihan." (MA.7, 27). Ret eo kounañ en em lakae ar Yuzevion da vugale Doue nemeto hag ez anvent chas an estrenion, ar baganed. Ar ger "bihan" implijet gant Jezuz a habaska an doare-lavar-se, hag e vousec'hoarzh a ra anezhañ ur garchennerezh dizrouk.

Ned eo ket a-walc'h da drugarez Jezuz pareañ ar re glañv, adsevel ar re varv da vev, frealziñ ar re enkrezet. D'ar bec'herion ivez ez astenn e drugarez. Rak, emezañ, "n'on ket deuet evit barn ar bed met evit salviñ ar bed ..." (YA.12, 47), "evit salviñ ar pezh a oa kollet." (LU.19, 10). Rak-se, d'ar bihanañ merk a geuz, e ro an distaol. Glebiañ a ra ur bec'herez e dreid gant he daeroù hag o se-c'hiñ gant he blev:"Pardonet eo da bec'hedoù," emezañ d'ar vaouez. (LU.,7, 36-48). Pardonin a ra d'ar wreg avoultrerez. "Me kennebeut n'az kondaonin ket." (YA.8, 12). "Pardonet eo da bec'hedoù," a lavar d'an den seizet e izili. (MZ.9, 2). Ha da bet all e ro ar pardon, da Zac'he ha me 'oar-me !

E enebourion, anat eo, a gav abeg en e emzalc'h. "Hennezh a zegemer ar bec'herion." (LU.15, 2). Hag-eñ da respont : "N'eo ket ar re yac'h o deus ezhomm eus ar medisin, met ar re glañv. Kit eta da zeskiñ petra eo ar gomz-mañ |lavaret gant ar Profed Ozeas| : "An drugarez eo a glaskan, ha n'eo ket ar brofadenn ... Rak-se n'on ket deuet da c'hervel ar re reizh met ar bec'herion..." (MZ.9, 12-13). Ha neuze e tispleg dezho teir farabolenn an dru-



garez : ar Mab Foran, an drac'hma kollet, an dañvadez dianket. Dre an hini diwezhañ dreist-holl e ro Jezuz da gompren pebezh karantez en deus evit ar bec'herion, dre an damant hag ar vadelezh a vez gantañ o klask hag o tougen en-dro d'ar gêr an dañvadez dianket. Ne wallgas ket anezhi, pell emañ : he sammañ a ra wareziskoaz en ur ankouaat e skuizhderioù e-unan. "Bez' e klaskin an hini gollet, e te-gasin an hini dianket, e louzaouin an hini c'hloazet, e parein an hini glañv..." (EZ.34,15-16). Ar pastor mat diouganet eo ar Mesiaz : "Me eo ar Pastor mat." (YA.10, 11).

Met "ar pastor mat a ro e vuhez evit e zeñved,..." (YA.10, 11). C'hwezhet eo ar skeudenn-se. An hini gwellañ eus ar vesaerion ne roio ket e vuhez evit salviñ e zeñved. Kement-se a vefe diotach a-hend-all rak buhez un den a dalvez muioc'h eget hini kant tropell. Fellout a ra da Jezuz reiñ da anaout dre ar skeudenn-se keal ur garantez dreistmuzul. Hag end-eeun ez eo "dre ur garantez divent en deus Jezuz hor c'haret..." (EF.2, 4). Rak buhez an Den-Doue a dalv ez-divent muioc'h eget hini an holl dud, ha koulskoude "ez eo deuet Mab an Den evit reiñ e vuhez evel daspren evit an

dud. "En em roet en deus evel daspren evit an holl..." (MZ.20, 28), hag e varv war ur groaz evit silvidigezh an holl dud. "En em roet en deus evel daspren evit an holl..." (I DI.2, 6) hag evit pep hini ac'hanomp enta.

Gant ar pec'hed ez eus bet degaset un dle e-keñver reizhded Doue, ar boan a varv kemennet gant al Lezenn. Evit frankizañ an den eus sklavelezh ar marv peurbadel e paeo Jezuz an daspren hag ez akuito an dle en ur reiñ priz e wad, en ur vervel e-lec'h ar re gablus. "Skoet eo bet d'ar marv evit hor pec'hedoù..." (IZ.53, 8). Hag a-youl eo : "Den ebet ne zilam va buhez diganin met he reiñ a ran diouzhin va-unan..." (YA.10, 13). Evel-se e prou e garantez evit an dud, "rak n'eus ket brasoc'h garantez eget reiñ e vuhez evit e vignoned..." (YA.15, 13)

Evit e vignoned... Met evit krouadurioù dispac'het, evit enebourion ? Evit gwir "marvet eo an Aotrou krist evit tud fallakr. Marteze e kredfe unan bennak reiñ e vuhez evit un den reizh, evit un den mat. Met Doue en deus prouet anat e garantez en hor c'heñver, o vezañ maz eo deuet an Aotrou Krist goude ma oamp pec'herion c'hoazh da vervel evidomp..."


(Rm 6, 9). Roet en deus e vuhez "eñ, an hini dibec'h, evit ar bec'herion..." (I Per 3, 18).

Ne c'hell ket ur bugel nac'h garantez e vamm marhe deus marvet evit ma vevo-eñ. Ha ni, daoust hag-eñ e nac'himp garantez Doue evidomp pa welomp e Vab war e dremenvan, stag ouzh ar groaz hag o vervel a-youl-gaer evidomp ! " Ha da heul pebezh bourevezhioù e ro e vuhez ! Ret e vefe prederiañ war ar Basion penn-dabenn evit henn kompren un tammig : o c'houzañv an tremenvan, o c'hweziñ ar gwad, trubardet, skourjezet en un doare euzhus, kuruennet a spern, kroazstaget, kunujennet, goapaet ... "Roet em eus va c'hein d'ar re a skoe ganin. N'em eus ket kuzhet va dremm diouzh an dismegañsoù hag ar skopadennoù..." (IZ 50 6). "War va c'hein o deus aret an arerion, hag astennet o irvi. Kement hini am gwel a ra goap ouzhin. Ur bagad hailhoned am arsailh a bep tu. Toullet o deus va daouarn ha va zreid..." (SA 129, 3 ; 22, 8,17). "Eus seul e dreid betek lein e benn n'eus netra yac'h ennañ: gloazioù, bloñsadennoù, goulioù digor ha n'int bet bet louzaouet na lienet. Trebarzhet eo bet, brevet en abeg d'hor pec'hedoù ; ha ne zigore ket zoken e c'henoù, evel un oan a gaser d'al

lazhdi..." (IZ 1, 6 ; 53, 8,17). "Hor glanaet en deus eus hor pec'hedoù en e wad..." (DIS 1 5)

Distro en neñv, n'hon dilez ket Jezuz:" N'ho lezin ket emzivadad..." (YA 14, 18). "M'emaon ganeoc'h betek fin ar bed..." (MZ 28, 20). Bez' ez eo ur vezañs diwelus, gwirion avat, hollvedel, efedus, diogeloc'h eget e-pad m'edowar an douar. "Setu m'emaon war an treuzoù ha ma skoan. Maz eus unan bennak o tigeriñ din an nor ez antrein d'e gaout..." (DIS 3, 20). "Ha maz eus unan bennak am c'har, va Zad a garo anezhañ hag e teuimp davetañ hag e vimp o chom ennañ..." (YA 14, 23).

An Dreinded Sakr eo a zeuio ennomp rak an Tad hag ar Mab a gaso deomp ar Spered Santel - ar Spered a Garantez a zeu eus an Tad hag eus ar Mab hag a unan anezho. "Evel-se "ez omp santualioù Doue, hag emañ Spered Doue o chom ennomp..." (I KOR 3, 16). "War-bouez ur siell oc'h bet merket gant Spered ar Bromesa..." (EF 1, 13). "Doue en deus roet deomp ar Spered Santel..." (I DE 4, 8). "Ha kement hini a zo merket gant Spered Doue a zo ur bugel da Zoue ; ha mard omp bugale Doue ez omp ivez heritourion e Rouantelezh..." (RM 8, 14,17).



"Rak setu m'emaon o vont da aozañ lec'h deoc'h. Ha pa vin aet e tistroin hag e kemerin ac'hanoc'h em c'hichen, evit ma viot-c'hwi ivez el lec'h ma vezin-me ha ma welot va gloar ..." (YA 14, 2-3 ; 17, 24).

Dre ar vadeziant eo e teuomp da vezañ izili an Aotroù Krist, e tegemeromp ar Spered Santel - ar Spered a Garantez, hag e teuomp da vezañ heritourion Rouantelezh Doue : "Mar ne vez ket ganet unan bennak eus an Dour hag ar Spered, ne c'hell ket mont tre e Rouantelezh Doue..." (YA 3, 5). "Hor salvet en deus Doue, diwar doug e drugarez, en ur reiñ dimp bezañ ganet d'ar vuhez nevez dre welc'hadenn ar Spered Santel ; ar Spered-se hag en deus Doue skuilhet anezhañ warnomp a-builh, dre an Aotroù Krist, hor Salver ; ha neuze, adreizhet gant gras an Aotroù Krist e teuomp da vezañ heritourion ar vuhez peurbadus..." (DIT 3, 5-7)

Ha mar kouezhomp er pec'hed hon eus sakramant ar Binijenn, an Adunvanidigezh : "Da biv bennak e pardonot e bec'hedoù dezhañ e vezint pardonet..." (YA 20, 23). Ha pet gwech hon eus tennet hor mad anezhañ ? Neuze "ben-nigit Doue en deus graet en ho keñver diouzh e drugarez..." (IL 50, 22).

Hogen an uhelañ testeni a garantez a zo roet deomp gant Jezuz en deiz kent e varv : an Hegaristiezh, Sakramant an Acter. En hon touez, dre ur vezañs visterius, gwirion avat, e fell dezhañ chom ; en hor c'hreiz zoken e fell dezhañ chom, dre reiñ deomp e gorf hag e wad evel magadurezh : c'hoantaat a ra bevañ ennomp. E vadelezh hag e drugarez a splann er sakramant-se, gouestl eus an dasorc'hidigezh hag eus ar vuhez peurbadel : "Me eo bara ar vuhez ; an neb a zebr va c'horf hag a ev va gwad en deus ar vuhez peurbadel ha me a zasorc'ho anezhañ d'an deiz diwezhañ..." (YA 6, 48,54). Hag ar bromesa-se, graet antronoz kreskidigezh ar bara, a zo sevenet gantañ en deiz kent e Basion, pa ro d'e ebestel ar galoud da dreiñ ar bara en e gorf hag ar gwin en e wad (MA 14, 22-25) ; LU 22, 19-27). Daoust hag-eñ e c'hell bezañ brasoc'h karantez ?

Ha war ar groaz e ro deomp e vamm, pa zalc'h sant Yann lec'h an holl dud: "O welout e vamm, hag en he c'hichen an diskibl a gare, e lavaras d'e vamm: "Maouez, setu da vab!" Da c'houde e lavaras d'an diskibl : 'Setu da vamm!' " (YA 19, 26-27). Nag a c'hrasoù he deus Mari gounezet evidomp, marteze hep gouzout deomp !

Nag alies ez eo deuet d'hol lakaat war evezh ouzh ar riskloù a sachomp warnomp en abeg d'hor pec'hedoù hag evit deskiñ deomp an hent da dec'hout diouzh ar gwalleurioù a zo stag outo !

~~~~~

Kendalc'h ar bajenn 32 :

"An emzenadur a oa an diskoulm misterius n'eus nemetañ. Gouzañv ha digoll a c'hell an Aotroù Krist, paz eo den. Neuze e kemero an holl bec'hedoù warnañ : "Doue en deus lakaet warnañ pec'hedoù pep hini ac'hanomp." (IZ 53 6). "Doue en deus e lakaet da vezañ pec'hed evidomp..." (II KOR 5, 21). Ha peogwir ez eo e holl oberoù re un Doue o devo e boanioù hag e zigolloù un dalvoudegezh divent. Peurgevatal enta, dreistfonnus zoken, e vo an digoll a roio evit hor pec'hedoù." Pareet omp dre e c'houlioù ... " (IZ 53, 5) "Hor glanaet en deus eus hor pec'hedoù en e wad." (DIS 1, 5). Ivez : "El lec'h m'eo bet fonnus ar pec'hed ez eo bet fonnusoc'h c'hoazh ar c'hras..." (RM 5, 20).

~~~~~


KARANTEZ PEURGLOK EO KARANTEZ DOUE

Ar garantez wirion a zo ur garantez a vignoniez. Evel-se eo karantez Doue. Netra ne ra Doue evit an den a-benn resev an disterañ tra en distro. Gwelet hon eus ne c'hell an den pourchas gounid ebet da Zoue peogwir ez eo Doue ar Peurvad divent hag ez eo digant Doue e talc'h an den kement en deus, ar bout zoken. "Petra a zo dit ha n'az pefe ket resevet ? " (I KOR 4, 7). Evit mad e grouadurioù e ra Doue kement a ra ; ar garantez a zo arbenn doueel nemetañ ar C'hrouer.

Ur garantez a vignoniez eo karantez Doue. Evitañ e-unan, ha n'eo ket evidomp hon-unan e karomp hor mignon ; mad hor mignon a fell deomp, ha n'eo ket hon hini, hag ar mad-se eo a glaskomp degas dezhañ. Evel-se end-eeun eo e kar Doue, gant ur garantez a vignoniez, ha

evidomp hon-unan ha n'eo ket evit e c'hounid-eñ.

Ur gevatalded bennak etre mignoned a c'houlenn ar garantez avat. Hag un digevatalded divent a zo etre ar C'hrouer hag an den, krouet diouzh skeudenn Doue koulskoude. Neuze, evit gallout reiñ deomp e vignoniez, e tibrad Doue ac'hanomp betek ennañ e-unan. "Dre e c'hras ez omp deuet da gaout perzh e natur Doue..." (II PER 1, 4). "Evel-se "en ur zivizout diwar hor penn, a-raok ar grouidigezh, e vefemp advibion dezhañ..." (EF 1, 5) "en deus an Aotroù Krist roet da gement hini en deus e zegemeret ar galloud da vezañ bugale da Zoue..." (YA 1, 12). Bez' ez eo eta ar garantez etre tad ha mab : "Gwelit pebezh karantez en deus roet deomp an Tad, ma vezimp anvet bugale da Zoue, ha maz omp ! " (YA 3, 1)

Ar gwir vignoned a vourr en em gavout a-gevret an aliesañ ar gwellañ, ha n'eus tra guzh ebet etrezo. Evel-se eo etre Doue hag an dud. Karout a ra hor c'hompagnunezh. "Un drugar eo din bezañ e-touez mibion an dud." (SA 8, 3). "Gra din ur santual, ma chomin en o zouez..." (ER 25, 20). "Hag ar Verb a zo deuet da vezañ korf ha graet en deus e annez en

hon touez..." (YA 1, 14). Gwelet hon eus e fell da Zoue chom ennomp zoken : "Setu m'emaon war an treuzoù ha ma skoan ; maz eus unan bennak o tigeriñ, ez antreñ..." (DIS 3, 20). "Maz eus unan bennak am c'har e karo va Zad anezhañ hag e vimp o chom ennañ..." (YA 14, 23). Ne c'hellomp ket tizhout Doue ; neuze 'ta e teurvez dezhañ dont ennomp; eñ, ar C'hrouer divent, ennomp-ni, paour-kaezh krouadurioù ! Ha dre Sakramant an Aoter dreist-holl e chom en hon touez hag en hor c'hreiz, ma fell deomp digeriñ an nor dezhañ.

Didro-kaer eo en em ro Doue da anaout d'an dud diouzh maz int gouest d'e gompren ; outo e komz ; nevezif a ra dezho e bromesaoù, degas dezho koun eus o zonkad gwenvidik ha peurbadel en askre an Dreinded Sakr. "Yawe a gomze ouzh Moizez dremm ouzh dremm, evel ma komz un den ouzh e geneil..." (ER 33, 11). Komz a ra ivez da bep hini dre e goustiañs. "Reiñ a rin dezho ur galon evit anaout ez on Yawe ; lakaat a rin dezho va Lezenn e don o boud hag he skrivin war o c'halon..." (YER 24, 8 ; 31, 33). "Al lezenn a gemenn dit da zlead n'eo ket re bell, tostik dit avat, ez kalon, evit ma c'helli he seveniñ..." (AD 30, 11,14).

Hogen ez eo dreist-holl "e Vab unganet en deus e roet da anaout" (YA 1, 18) "Goude bezañ meur a wech hag e meur a c'hiz komzet gwechall ouzh hon tadoù dre ar Brofeded, en deus Doue, en deizioù-mañ, komzet ouzhimp dre e Vab." (HE 1, 1-2) Hag eñ hepken a c'helle e ziskuliañ en un doare klok. "Rak den ebet ne anav an Tad nemet ar Mab..." (MZ 11, 27). Hag hor skoliet en deus ervat : "Kement am eus desket digant va Zad am eus roet deoc'h da anaout..." (YA 15, 15).

Evit unvaniezh ar c'halonoù ez eo klok. "An hini en em stag ouzh an Aotroù a zo gantañ an hevelep spered..." (I KOR 6, 17), "rak emañ Spered Doue o chom ennañ..." (RM 8, 9).

Evit ma raio ar vignoniezh hon evurusted avat ez eo ret dezhi bezañ feal, aprouet ha dizaon e-keñver an dazont. "Netra ne dalv kement hag ur mignon feal..." (IL 6, 15). Feal ha padus eo avat mignoniezh Doue. "Karantez an Aotroù a chom a viskoazh da virviken..." (SA 103, 17). "Yawe a zo un Doue feal a zalc'h e emglev hag e vadelezh..." (AD 7, 9). Arouet eo rak n'eo ket nevez. "Da garet em eus diouzh ur garantez peurbadel..." (YE 31, 3). Hag aon ebet evit an dazont. "Hini pe hini

a vez mignon pa plij dezhañ met feal ne chom ket..." (IL 6, 8) N'emañ ket kont evel-se gant Doue avat "rak nepred n'en devez keuz d'e zonzonoù." (RM 11, 29). "N'eo ket un den eo Doue, gouest da geuziañ, a lavarje ha na raje ket..." (NM 33, 19). "Da viken e pad e garantez..." (SA 136, 1). "Na pa zeufe ar menezioù da steuziañ kuit ned aio ket diouzhit va c'harantez..." (IZ 54, 10). Zoken "ma ne chomomp ket feal dezhañ, eñ avat a chom feal." (II DI, 2, 13). Ha divent eo ar garantez-se rak Doue a gar an dud, e advugale, evel e Vab e-unan. "Tad, evel m'ac'h eus va c'haret e karez anezho..." (YA 17, 23)

Pep tra a zo boutin etre mignoned met dreist-holl etre tad ha mab. Neuze e ro Doue d'an den mestroniwar an holl grouadurioù gwelus. "Roet en deus Doue galloud d'an den war holl oberoù e zaouarn..." (SA 8, 7 ; GEN 1, 28). "Kement am eus-me a zo dit-te..." (LU 15, 31) a lavar Parabolenn ar Mab Foran : kement tra a zo, e Rouantelezh zoken, e eurvad hag e c'hloar. "Mard omp e vugale ez omp enta heritourion e Rouantelezh..." (RM 8, 17) Ha pa lavaro deomp "Kae e-barzh Rouantelezh da Aotrou..." (MZ 25, 21) "en em ziskouezo deomp hag e vimp heñvel

outañ..." (I YA 3, 2), "leun a c'hloar (KOR 3, 4), rak "gras ha gloar, setu donezon an Aotrou..." (SA 84, 12).

~~~~~

### KARANTEZ EO AN DOUE BARNER

"Doue en deus krouet an den evit an divar-velezh..." (FU 2, 23). Dre maz eo speredel an ene ez eo ivez divarvel ; dre maz eo graet ar c'horf gant danvez avat ez eo sujet ivez d'ar gemmidigezh, d'ar c'hloazusted, d'ar boan, d'an uzadur, d'ar marv. Ma oa dic'houzañvidik ha divarvidik ar c'horf a-raok ar pec'hed e oa a-drugarez d'ur brient a-berzh madelezh Doue, nemet un dreistgwir diwar ziviz e oa : "Eus frouezh ar wezenn a zo e-kreiz al liorz ne zebrot ket ; anez, e varvot !" (GEN 3, 3) Touellet avat gant gevier livet-kaer an diaoul o deus hor c'herent kentañ torret an difenn a oa bet graet outo ; kerkent ivez o deus kollet o dreistgwiriou. "Debret hoc'h eus eus ar wezenn am boa boa gourc'hemennet deoc'h chom hep stekiñ outi ; dre se e vo kresket ho poanioù ;



diouzh c'hwezenn ho tal e tebrot ho para ken na zistroot d'andouar..." (GEN 3, 11,16,24). O vezañ kollet o dreistgwirioù n'o deus ket gellet hor c'herent kentañ o zreuzkas d'o diskennidi ... En abeg d'o fec'hed ha d'hor pec'hedoù-ni "an den ganet eus ar vaouez a vev nebeut a zeizioù ha sammet eo gant reuzeudigezh e-leizh ..." (YOB 14, 1). Ouzhpenn-se en deus serret outañ dor-zigor an neñv, an eurvad divent ma oa krouet evitañ : a-benn kaout lod en eurvad Doue ez eo ret kaout perzh en e vuhez da gentañ ; hogen ar pec'hed, dres, a zistruj ar vuhez-se ennomp, ar c'hras-santelaat !

Met "an Aotrou Krist en deus hor glanaet eus hor pec'hedoù en e wad..." (DIS 1, 5). "Evit an holl eo marvet..." (II KOR 5, 15) Evit an holl : "Doue a venn ma vo salvet an holl dud..." (I DIS 2, 2,4). Koulskoude hon eus frankiz d'asantiñ pe da zinac'h. Ha maz asantomp ez eo ret deomp kenoberiañ : "Doue n'hor salvo ket hepdomp..." Un donezon eo ar vuhez peurbadel. Hep dellid ebet eus hor perzh eo roet deomp ar c'hras kentañ. Da c'houde avat - daoust ma reomp gant skoazell Doue, e c'hellomp hag e tleomp dellezout ar vuhez peurbadel ... "Pep hini a eosto ar pezh en devo hadet."

GA 6, 27). "Mab an Den a zaskoro da bep unan hervez e oberoù..." (MZ 16, 27). Rak "aes eo d'an Aotroù, da zeiz ar marv, reiñ d'an den diouzh e hent..." (IL 11, 24). "Doue a zalc'h e vadelezh e-keñver ar re a gar anezhañ hag a vir e c'hourc'hemenoù..." (AD 7, 9). "Neuze an hini a ra bolontez an Tad a zo en neñvoù, hennezh a yelo e-barzh Rouantelezh an Neñvoù..." (MZ 7, 21). Ar servijerion feal "a resevo digant an Aotroù e hêrezh evel gopr..." (KOR 3, 21). "Setu emañ o vont da aozañ lec'h deoc'h evit ma viot-c'hwi ivez el lec'h ma vezin-me..." (YA 14, 2-3) ; 17, 24).

Doue a ro d'an den e eurvad hag e c'hloar divent ha peurbadel. Bez' ez eo ar wenvidigezh ar gwel e Doue, ma teu d'e heul ur garantez hag un eurvad peurglok. "Evurus ar re a zo glan a galon rak int a welo Doue!" (MZ 5, 8). "E welout a raimp dremm ouzh dremm..." (I KOR 13, 15) ; ha dre ar welidigezh-se "e vezimp heñvel outañ." (I YA 3, 2).

Ar c'horf speredelaet en devo e lod ivez en eurvad neñvel ha peurbadel. An Testamant Kozh a gelenn ar feiz en dasorc'hidigezh. Hogen en Testamant Nevez eo dreist-holl e kaver ar muiañ a bennadoù o tennañ d'ar wirionez-se.

Alies e komz an Aotroù Krist diwar-benn an dasorc'hidigezh ; houmañ a zo prometet gantañ d'an hini a zebr e gorf hag a ev e wad; d'ar Sadukeidi e tiskouez e faziont o nac'h anezhi (MA 12, 18-27). Kadarnaat a ra "e teuy an eur ma vo klevet e vouezh gant an holl re a zo er beziou hag e teuint er-maez, - lod graet ar mad ganto, oc'h adsevel evit ar vuhez ; darn all, graet an droug ganto, oc'h adsevel evit an daonedigezh..." (YA 5, 28-29).

Peurevurus e vo ar re o devo graet ar mad. "Ar re feal a chomo e-kichen an Aotroù er garantez..." (FU 3, 9), "ha da viken e vezint gantañ." (I DE 4, 17). Aze, "na daeroù, na marv, na kañv, na garm, na gloaz ne vo mui anezho, dre maz eo tremenet ar bed kentañ..." (DIS 21, 4). Hag an anaon vat o devo o gwalc'h ha zoken en tu-hont d'ar pezh a c'hallomp ijinañ. "Ar pezh n'o deus ket gwelet daoulagad an den ha n'o deus ket klevet e ziskouarn, eo kement-se en deus ragaozet Doue evit ar re a gar anezhañ..." (I KOR 2, 9) Hag henn tañva a raint. "Hor Salver a dreuzneuzio hor c'horf reuzeudik d'e lakaat kenstumm gant e gorf a c'hloar..." (FI 3, 24). "Ya, trubuilhoù skañv ur predig amzer a vez oc'h aozañ deomp un

teñzor, hag unan dreistmuzul, a c'hloar beurbadel." (II KOR 4, 17).

Kemer perzh en eurvad div'ent Doue, sed ar pezh ez eo an neñv. Evel pa gomzomp eus Doue enta ez eo aesoc'h deomp lavarout ar pezh n'eo ket eget ar pezh ez eo. "Biskoazh n'eo deuet en-dro den da lavarout deomp," a lavar ar re ziskredik. Padal e kav din ez eo deuet ar Werc'hez Vari, da vihanañ, da gomz deomp eus an eurvad-se p'he devez bet tro d'en em ziskouez. Evit reiñ un alberz eus mister an eurvad-se e c'hellfemp evelkent degas amañ skeudenn an nadoz-aer. Pelec'h hon eus lennet an hañvaladenn-se ? Ne ouzomp ken ; ha ne ouzomp ket kennebeut piv eo an hini en deus hec'h ijinet. Klaskomp treuzskrivañ anezhi avat. Preñvedenned o doa klevet : pa vez unan ac'hanomp o vont diwar wel e vez peurdreuzfurmet ha bevañ a ra da c'houde ur vuhez disheñvel-krenn en ur bed marzhus. Un deiz e reont kenetrezo ar gouestl-mañ : kentañ hini ac'hanomp a yelo kuit a zistroio da lavarout deomp ha gwir eo pezh a gonter. Un deiz bennak war-lerc'h ez eas unan anezho diwar wel. Pebezh marzh ! Ar pezh a oa bet lavaret dezhi pa n'oa anezhi nemet ur breñvedenn o

vevañ el lec'hid pe er geot-dour ne oa nemet ar skeud eus ar wirionez. Mibin-eston e oa deuet da vezañ, dezhi eskell-strink, a roe an tu dezhi da nijal prim, dezhi ivez daoulagad gouest da welout an heol skedus hag ar bleu-nioù liesliv ha liesstumm, dezhi ouzhpenn ur c'horf a liv gant ar ganevedenn ; ha klevout a rae kan heson an evned... Lies gwech he deveze plavet war ur vleunienn loa-zour ha klasket he doa splujañ davet he c'henouennadzed evit komz dezho eus he buhez nevez ha dudius en ur bed boemus. N'oa tu ebet avat ! Ne voe ket evit derc'hel d'he ger ! "Etrezompni ha c'hwi ez eus bet kleuziet un islonk didreuzus... Pa ne selaou ket |tud zo| na Moizez nag ar Brofeded |nag an Iliz|, goude ma savfe unan bennak a-douez ar re varv, ne vefent ket lakaet da grediñ..." (LU 16, 26-31).

Gwalleur peurbadel avat evit ar bec'herion aheurtet. "Ar re fall a resevo ar c'hastiz a zo dleet d'o mennadoù..." (FU 3, 10). "Kit pell diouzhin, tud villiget, d'an tan peurbadel..." (MZ 25, 21). Ar Werc'hez Vari a ziskouezas da vugale Fatima an ifern hag e euzhadennoù ; hag ar vugale a anzavas e vijent marvet gant ar spont ma ne vijent ket bet sikouret gant ar

Werc'hez.

Re vat eo Doue evit daonif da viken, a lavarer a-wechoù. Evit gwir, mat ha trugarezus ez-divent eo Doue ; hogen renet e vez an drugarez-se gant reizh ar furnez ha ne c'hell ket tizhout ar bec'herion aheurtet en droug, ar re en em laka a-ratozh hag a-youl dizellezek anezhi, hag a zistaol anezhi groñs, a-benn ar fin. A-hed hor buhez e vezomp bepred galvet en-dro gant Doue hag a ro deomp e c'hrasoù gant largentez, ha prouennoù e-leizh eus e garantez : an Aotrou Krist, e Basion, Sakramant an Aoter, Sakramant ar Binijenn. Petra n'en deus ket graet ha petra ne ra ket c'hoazh evit hor salviñ ! Hogen kemenn a ra deomp ivez bezañ war evezh : "Diwallit, beilhit rak n'ouzoc'h nag an deiz nag an eur..." (MA 13, 33). "Setu m'emaon e toull an nor ha ma skoan : maz eus unan bennak o tigeriñ din ez antreñ..." (DIS 3, 20) Maz eus unan bennak ! Rak Doue a zouj d'ar frankiz en deus roet d'an den. "Lakaat a ran dirazout ar vuhez hag an eurvad, ar marv hag ar gwalleur, hervez ma kerzhez pe get en hentoù da Zoue ha ma virez pe nann e c'hourc'hemenoù..." (AD 30, 15-16) N'eo ket Doue an hini a zaon enta; ar pec'her

an hini eo a zibab e beurbadelezh ; kavout a ra ar pezh en deus dibabet e pep frankiz.

Ha c'hoazh, Justis Doue a vez kuñvaet gant an deneridigezh : ne ra ket deomp hervez hor pec'hedoù. (SA 103, 10). Ha liz da Sant Tomaz Akwino e c'heller lavarout e ro Doue e drugarez zoken d'ar re zaonet, n'eo ket o tieubiñ anezho eus ar c'hastiz a zo stag ouzh o fec'hed, hogen dre ma ne vezont ket ket kastizet evel ma tellezont.

"Kit, tud villiget, d'an tan peurbadel..." Hag er bedenn a erbed d'ar vugale eus Fatima e lavar ar Werc'hez Vari: "Hon diwallit diouzh tan an Ifern." Breutaat a ra ar feizoniourion atav diwar-benn natur an tan-se. Didalvoud eo emellout en o breutaennoù ; talvoudusoc'h eo kemer an hent a viro ouzhimp a anavezout dre skiant-prenet natur an tan-se !

"An Ifern," eme Jord Bernanos, "a zo chom hep karout ken... Chom hep karout ken, se a dalv da lavarout, evit an den bev, karout nebeutoc'h pe karout e-lec'h-all." Rak-se ne gomprenomp ket ar boan a vez degaset gant an digarantez : chom hep karout ken, chom hep karout netra, den ebet, zoken ha dreist-holl chom hep en em garout hon-unan ; pebezh poan



a vez o kasaat hag o villigañ an holl vouldoù, Doue, an diaouled, an anaon vat hag anaon an Ifern, en em gasaat hag en em villigañ honunan, - ya, en em gasaat hag en em villigañ evit bezañ bet kiriek d'hon daonedigezh peurbadel en ur soñjal e c'halljemp bezañ gounezet an eurvad peurglok a bado da viken, ur boan hag a zo kresket gant ar soñj eus peurvad an neñv er beurbadelezh !

"Lakaat a ran dirazout an dour hag an tan, ar vuhez hag an eurvad, ar marv hag ar gwalleur,..." Dit-te eo dibab ; derc'hel a rin kont eus da zibab hag henn roin dit evit ar beurbadelezh.

~~~~~

KARANTEZ EVIT KARANTEZ

Hor c'haret en deus Doue kent reiñ deomp ar bezoud zoken ; hag atav e kar ac'hanomp gant ur garantez divent ha peurbadel. Krouet en deus an den evit gallout, eñ hag a zo mat ha trugarezus, reiñ e vadelezhoù d'ar re a gendalc'ho d'e servijañ. Aberzhet en deus e Vab doueel. Hag asantet en deus ar Mab da reiñ e vuhez evit hor silvidigezh. "N'eus ket brasoc'h karantez eget hini neb a ro e vuhez evit e garidi..." (YA 15, 13). Ha pa vez kont a reiñ ar vuhez evit enebourion avat ! Neuze 'ta, "karomp Doue peogwir ez eo eñ an hini en deus hor c'haret da gentañ..." (I YA 4, 4,5). Ha betek pegeit ! A-hend-all "penaos chom hep karout an hini en deus hor c'haret kement ? " (ADESTE). "'Kerzhomp enta en hent ar garantez ..." (ÉF 5, 2)

"Karout Doue avat a zo mirout e lezennoù,"

(FU 6, 18), "a zo mirout e c'hourc'hemennoù ..." (I YA 5, 3). "C'hwi eo va mignoned, mar grit ar pezh a c'hourc'hemennan deoc'h..." (YA 15, 14). "Rak kement-mañ eo ar garantez : en em ren diouzh e c'hourc'hemennoù..." (II YA 6, 6)

Reiñ a ra Doue e c'hourc'hemennoù. Hevelep frazenn, hep muiken, a laka diouzhtu ur c'halz a dud da hirisiñ ha da heugiñ. Hiziv ne fell ken d'an dud klevout anv a lezennoù nag a c'hourc'hemennoù; o degemer a vefe koulz evito ha dilezel o frankiz ha sujañ d'ur redierezh bennak ha d'ur seurt atahierezh. O gwirioù a c'houlennont groñs en ur nac'h pep dlead a-hend-all. Ne fell dezho klevout anv nemet a frankierezh, a zishualerezh, a 'ziglorerezh', a zellid mab-den ha me 'oar-me, a zo kement-all a draoù mat, - se a zo da lavarout, hag a zleomp kas tizhout ; met kavout a ra dezho ez eo gourc'hemennoù Doue ur redierezh tidel ijinet gant un noualant mac'hom.

Koulskoude e lavar Doue deomp dre hantouriezh ar Salmour hag aozer an Adlezenn : "Lezenn an Aotroù a ro buhez, a laka da vezañ fur, a laouena ar galon ; mir ar gourc'hemennoù-se am eus kemennet dit evit tizhout an

eurvad..." (AD 30, 15-16 ; SA 19, 9). Evit tizhout an eurvad ! Emañ ar gwir gant Doue ; an dud eo a gammvarn ! An darvoudoù en laka anat. Digorit ar c'helaouennoù ; enaout ar skingomz pe ar skinwel : n'eus keal nemet eus brezelioù, torfedoù, skraperezhioù, avoultriezhioù, diforc'hidigezhioù diwar vugale, torroù-dimezioù - kasonioù, gant an holl walloù a zegasont d'o heul ; hep komz eus an traoù a vez tavet warno : gwallskouerioù dianav pe guzhet, dimezioù war arnod, paotred ha merc'hed yaouank o riboulat hag o lonkañ betek bezañ mezv-dall, korollerezh o tigeriñ an nor d'an hudurniezh h.a. Daoust ha kement-se a zo frankiz, dis-hualded pe... 'digloradur', dellid mab-den pe e eurvad ? Daoust hag-eñ n'eo ket kement-se, kentoc'h, bezañ sklav d'ar c'hoantegezhioù diroll, d'an displetoni ? Daoust hag-eñ n'eo ket kement-se gwalleur an hinienn hag ar gevredigezh, kentoc'h c'hoazh !

Hag e pelec'h emañ orin hag abeg an holl walloù-se ? Hama, e disprizadur gourc'hemennoù Doue ! Gwir-mat e lavar ar Skritur Sakr : "Gourc'hemennoù an Aotroù Doue a zo fur ; laouenaat a reont ar galon ; o c'hemenn a ran evit da eurvad..." (AD 10, 13)

Mar hor c'har Doue kement-all, ne c'hell mennout nemet hor mad, hon eurvad. Ne c'hell reiñ deomp gourc'hemenoù nemet evit hol la-kaat da vezañ evurus. Ha gwir-mat eo adarre - gwelet hon eus en hon amzer dreist-holl da belec'h omp kaset o chom hep mirout ar gourc'hemenoù ; ar re-mañ enta n'int ket redie-rezhioù, destrishaerezhioù, urzhioù tidel ha di-boell, harzoù o krennañ hon dellid hag hon eurvad a dud ; kentoc'h avat ez int peulioù-kevaroueziañ a ziskouez deomp an hent da dapout an eurvad. Daoust hag ar panelloù-hent a vez plantet gant gwazerezh ar Pontoù-ha-chaoserioù a-benn hegasiñ ar vlenierion-girri pe evit rentañ servij dezho ? Hag en degouezh-mañ, petra a zo abeg d'ar gwalleurioù a c'hoarvez war an hentoù, miridigezh an dezveg pe an dorridigezh anezhi ? Doue a oar gwelloc'h egedomp petra a zo e kalon an den, petra 'zo mat dezhañ evit e eurvad, an eurvad-se a venn Doue pourchas deomp da n'eus forzh pe-seurt priz. Greomp fiziañs dezhañ. Ne zifenn ouzhimp nemet ar pezh a zo fall.

Miomp ez-leal ar gourc'hemenoù evit seveniñ hon eurvad. Ha peogwir avat e ro Doue anezho deomp dre garantez en hor c'heñver,

miomp anezho gant karantez hag anaoudegezhvat, gant levez, evel madelezhioù a-berzh Doue, ha n'eo ket evel ur bec'h pounner. "Skañv eo va samm." (MA 11, 30). "Henn kemenn a ran evit da eurvad..." (AD 10, 13). Kompomp-eñ hag ar gourc'hemenoù a laouenaio hor c'halon hag a zegaso deomp ar gwir eurvad er bed-mañ hag an eurvad divent ha peurbadel er bed all.

Ar garantez, ar vadelezh, an drugarez... holl beurglokterioù Doue a zo divent, ha Doue e-unan a zo hegarat-dreist ; hag hegarat eo enta ivez e Justis rak hepti e vankfe da Zoue unan eus e beurglokterioù. Evel ma lavar Bossuet : "Ar garantez a zo graet evit an hini hegarat ; hag ar garantez dreist evit an hini hegarat-dreist. Reizh ha naturel ez eo enta e ve karet Doue muioc'h eget ar re all ; ha fol-lentez eo dinac'h e garantez ouzh Doue." Alies e karomp ar re n'o deus graet deomp na mad na droug. Neuze 'ta, karomp Doue ; n'eo ket hepken dremaz a kement perzh-mat a zo d'ober e voud, hogen dre ma karg ac'hanomp gant e vadelezhioù : "Ar garantez kefleun a gas an aon kuit..." (YA 4, 18) Ha dav eo deomp ivez karout Doue evel ur madoberour, ur salver, ur

mignon gwirion, ha n'eo ket evel ur barner garv ha diblegus. Ha Doue a garo ac'hanomp gant ur garantez divent : "Karout a ran ar re am c'har hag am c'hask gant mall..." (SA 8, 17).

"Kement-mañ eo avat ar garantez : en em ren diouzh gourc'hemenoù Doue..." (II YA, 6) "Ha setu e c'hourc'henn brasañ : en em garout an eil egile ; ha n'eo ket dre gomz hepken met dre hon oberoù..." (I YA 3, 23,18). Jezuz a adkemer gourc'hemenoù an Testamant Kozh : "Karout a ri an Aotroù da Zoue gant da holl galon, gant da holl ene, gant da holl nerzh..." (AD 6, 5) : "Setu amañ ar brasañ hag ar c'hentañ eus ar gourc'hemenoù, hag an eil a zo heñvel outañ : karout a ri da nesañ eveldout da-unan..." (MZ 22, 37-39). "Karit zoken hoc'h enebourion ; neuze e vo bras ho kopr en neñvoù..." (LU 6, 35). Goulenn a ra diganeomp pardonñ evit bezañ pardonet, "bezañ trugarezus evel maz eo hon Tad trugarezus ; rak diouzh ar muzul a vuzuilhomp gantañ e vo muzuliet deomp d'hon tro..." (LU 6, 36-39). "Didruez e vo ar varn evit neb na vo ket trugarezus, met an drugarez a vo trec'h war ar varn..." (JA 2, 13). Ar varn diwezhañ a vo



Neb a zo dibec'h
Laolec ar maen Kentañ

durc'het dreist-holl ouzh hon darempred gant an nesañ..." (MZ 25, 31-46). Neuze 'ta "evurus ar re a zo trugarezus, rak int ivez a vo graet trugarez dezho..." (MZ 5? 7)

Karomp Doue hag an nesañ ; Doue a vo hor mignon ha ni ivez a vo e vignoned evit ar beurbadelezh.

"Lavarit bennozh d'an Aotrou rak peurbadel eo e vadelezh, e drugarez hag e garantez..." (I DAN 16, 34 ; SA, 107). Ya avat, "karantez Doue a fell din kanañ da viken!" (SA 89, 2)

*** **

"Digorit va daoulagad, Aotrou, maz arvestin ouzh burzhud ho Lezenn..." (SA 119, 18). Mirout ar gourc'hemennou gant levez; servijout Doue gant levez, setu ar pezh a erbed sant Paol: "En em laouenait en Aotrou ; henn lavarout a ran adarre : en em laouenait ha na vezit nec'het gant netra..." (FI 4, 4-6). Ha se n'eo ket un ali hepken, - un urzh strizh, ne lavarant ket !

Ar gourc'hemenn-mañ a blijfe a-walc'h dimp met en em c'houlenn a reomp ha ken aes se ez eo, ha ken aes eo ha ma soñj da sant Paol

bezañ bepred laouen ha dinec'h. War a seblant, ar c'hontrol eo a vefe aesoc'h; ha kalz muioc'h a abegoù hor bez ivez peurvuiañ da vezañ trist ha nec'het. Pa gounomp an amzer dremenet hounnezh a zegas da soñj deomp estreget eñvor an evurusted ; ha n'eo ket gwelloc'h an amzer vremañ. Ma troomp hor selloù war-du an dazont, hemañ a seblant bezañ teñval ha karget a goabrennoù du. Neuze, sur a-walc'h, e kredit e oa ar bed eus ar c'hentañ gant sant Paol pa oa o komz evel-henn, pe, da vihanañ, e oa madik a-walc'h. Siwazh, d'ar c'houlz ma skrive kement-se e oa bet e vuhez endeo karget rez a drubuilhoù hag a walleurioù ; ha d'ar mare-se end-eeun ma save al linennoù-se edo en ur stad poanius-kenañ hag arvarus-meurbet e oa ivez e zazont : gortoz a rae bezañ barnet ha ne ouie ket peseurt tonkadur e vije e hini; hag er c'harc'har edo c'hoazh pa skrive : "Leun-barr a levenez eo va c'halon ! " Ha pet re all war e lerc'h o deus miret pe, zoken, dizoloet al levenez e-kreiz an diaesterioù, ar poanioù, an heskinadurioù, ar bourevezhioù ...?

Aes eo kompren : bez' ez eus falslevenezioù ha levenezioù gwirion. Ar gwir levenez eo a zo

tañvaet hag erbedet gant sant Paol : "Chomit e levenez an Aotroù ! " Ar gwir levenez a zo e Doue. M'hon eus ar feiz ha m'emañ hor c'houstiañs e peoc'h, n'hon eus ket da vezañ trist ha nec'het. Daoust ha n'eo ket kement-se o deus desket ar pajennoù-mañ ? Ya, Doue hag a zo karantez hor c'har; hor c'hrouet en deus dre garantez, evit hol lakaat da gemer perzh en e eurvad divent ha peurbadus. Koll a reomp an eurvad-se dre ar pec'hed : neuze e pardon hag e c'houlenn digant e Vab dont d'hon dasprenañ eus sklavelezh ar pec'hed hag eus ar marv peurbadus a zo an heuliad anezhañ. Hag ar Mab muiañ-karet a asant, a zeu war an douar, a zeu da vezañ unan ac'hanomp, a ra e annez en hon touez hag en hor c'hreiz zoken ; gouzañv a ra ur marv kriz ha reiñ a ra e vuhez evit hon dasprenidigezh hag hor silvidigezh ! Ya, "kanit hag en em laouenait rak en ho kreiz emañ Doue... " (ZA 2, 14). "Tridit gant al laouenidigezh : an Aotroù, ho Toue, a zegas deoc'h ar silvidigezh ! " (SOFO-NIA 3, 14,17). Donedigezh ar Salver a zle leuniañ a levenez hag a anoudegezh-var kement hini a gompren anezhi : "Setu ma tegemennan deoc'h ur c'heloù mat hag a roio levenez d'an

holl bobl : ganet ez eus bet deoc'h ur Salver..." (LU 2, 10-11). Pep hini ivez a c'hell lavarout : "Mab Doue en deus va c'haret hag en em roet d'ar marv evidon!" (GAL 2, 20)

Al levez en Aotrou, an hini wir, na c'hell netra na nikun skrapañ diganeomp, hounnezh a zo da gentañ levez a-berzh ar feiz: anaout Doue dre an Diskuliadur, Doue, ar Boud Divent, a zo ar Garantez hec'h-unan, an eurvad hec'h-unan, ar Peoc'h e-unan, al Levez hec'h-unan. Levez diwar c'houzout ez eo an Doue-mañ un Tad a gar ac'hanomp, en deus e Vab roet e vuhez evidomp (ar pezh a zo ar brasañ prouenn a garantez), ez omp santelaet gant ar Spered a Garantez, e vev ennomp an Tri Ferson doueel-mañ hag e vevomp-ni en o c'harantez. Levez o c'houzout en deus an Doue-Karantez-mañ graet ac'hanomp heritourion ; da lavarout eo, e fell dezhañ reiñ deomp perzh en e eurvad, en e beoc'h, en e levez e-doug ar beurbadelezh hag ez eo evit se e ro deomp gourc'hemenoù a ziskouez deomp hent an neñv - hag e pardon deomp hor pec'hedoù : "Evurus an den a vez pardonet dezhañ e bec'hed ! " (SA 32, 1). Levez a-berzh an esperañs enta,



TAOLENN

Karantez eo an Doue Treinded, p.5
Karantez eo an Doue Krouer, p.12
Karantez eo an Doue dismegañset, p.19
Karantez eo an Doue Salver, p.30
Karantez peurglok eo karantez Doue, p.46
Karantez eo an Doue barner, p.52
Karantez evit karantez, p.61

